

BE NEVE  
**SANT ERVOAN**

---

AR PARDON BRAZ

---

DISKAN

O sant Ervoan vinniget,  
Pedet vit ho Pretoned,  
Ha war ho pe neve  
Ni gano Trugare.

N'euz ket eur Zanten Breiz, n'euz ket evel sant Ervoan,  
Ker stank he viraklo, ker mad d'ann dud a boan;  
Na ken kaer hag he ve, enn iliz vraz Landreger,  
N'euz hini all e bed nemet be hon Salver.

Otro mad sant Ervoan, ker pinvidig enn Envo,  
Reit bepred he vennad da neb a c'houlenno;  
Dalc'het war douar Breiz lealded ha karante,  
Ha gant-he kudennet hon iez koz hag hon fe.

Ho pennoz d'ann Eskop ha d'ar re neuz zikouret  
Sevel el Landreger eur be zo ker brudet!  
Ann hini ro d'ar zent, gant Doue e ve peet  
— Ha kant evit unan, — ar Pab neuz hel laret.

Bennoz war hon Eskop, en euz roet he vennoz  
War ho pe, sant Ervoan, ker pleustret gwech-all goz!  
Bremen c'hoaz war-n-ehan, enn iliz vraz sant Tual,  
E tei ar Vretoned da bedi vel gwech-all.

Ar bruk a vleui bepred war lein lanno Breiz-Izel  
Ha war lez ar mor braz e c'hourdrouz ar rec'hel  
Ho Pretoned bepred a gar ann otro Doue,  
Sikouret-he, sant kez, da gad ho lod enn Ee.

C'houi zo bet mad d'ar paour, gant ar paour ni lodenno,  
Hag ar paour a roi d'imp lod enn he bedenno.  
Balamour da Doue, c'houi zo bet mad d'ho nesan,  
Balamour da Doue, ni garo annehan.

War ann tad hag ar vamm ha war ar vugaligo,  
 Reit ho pennoz, sant kez, euz a grec'h ann Envo;  
 Dalc'het enn hon zier peuc'h ha karante lirzin,  
 Evel ma oa gwech-all enn maner Kervarzin.

Leal vel kristenien, ha da noz, ha da vintin.  
 Ni laro hon feden, stouet war ann daoulin;  
 Bep sul enn ofern bred, ha bep sul er gouspero,  
 Enn hon iliz parous, Jezuz-Krist hon gwelo.

Daleg ma oa bugel, sant Ervoan a direde  
 Da glevet enn iliz prezeg komjo Doue.  
 Ni chileoo vel-t-han sarmonio hon beleien :  
 Evel-se e vefomp bepred gwir gristenien.

O lenn bue ar zent, e neuz disket sant Ervoan  
 Bean en Breiz-Izel eur zant braz he-unan;  
 Ni a rei evel-t-han bemnoz goude hon feden :  
 D'ann oll skouer vad ar zent a zo eur brezegen.

Vel ma karer eur vamm, sant Ervoan a neuz karet  
 He iliz Landreger, lec'h ma oe badeet;  
 Ilizik ma farouz, bepret m'ho karo ive :  
 Enn-hoc'h, en peb amzer, e kavan ma Doue.

Enn Paris vel er ger, sant Ervoan zo bet fidel  
 Da gentelio Azo, he vamm vad ha santel.  
 Soudard ha martolod, n'ankouet biken ho mamm,  
 Hag e teufet d'ar ger didamal ha dinam.

Gwelloc'h vit sant Ervoan, n'euz ket bet en Breiz-Izel,  
 Da difenn gouir Doue hag ann Iliz santel;  
 Ni diskoueo vel-t-han ec'h omp ive kristenien :  
 Ni difenno Jezuz hag he oll veleien.

War ve hon zant Ervoan aliez ni daoulino,  
 Da c'houlen digant-han nerz vad d'hon c'halono;  
 Ha gant-han ni disko bean sent, ô Bretoned :  
 Eno, eno hep-ken, man ann evurusted.

#### DISKAN DIWAN

O sant Ervoan vinniget,  
 Pedet vit ho Pretoned,  
 Hag eunn de enn Envo,  
 Sant kez, ni ho kwelo.

L. S. E.